


ESKOPTI KEMPER ha LEON



KENVREURIEZ
ar
BREZONEG

K A I E R 2I

- TAOLENN -

5ved SUL FASK A.....	II8
6ved SUL FASK A.....	I2I
7ved SUL FASK A.....	I23

+++++

9ved SUL ORDINAL. A.....	I25
IOved SUL ORDINAL A.....	I27
IIved SUL ORDINAL A.....	I29
I2ved SUL ORDINAL A.....	I3I
I3ved SUL ORDINAL A.....	I33
I4ved SUL OR INAL A.....	I35

+++++

Derhent Gouel Sant Yann Vadezour.....	I37
Gouel Sant Yann Vadezour.....	I40

+++++

E peleh kaoud...

Gouel ar Yaou-Bask.....	K.5 p.2I
Sul ar Pantekost.....	K.6 P.6
Gouel an Dreinded Santel.....	K.6 p.II
Gouel ar Zakramant.....	K.6 p.I5
Gouel ar Galon Zakr.....	K.6 p.I9
Derhent Gouel Pèr.....	K.7 p.I3
GOUEL an Ebestel Pèr ha Paol.....	K.7 p.I7

+++++

Troidigeziou aotreet,dre arnod, evid an Eskopti,
 aberz an Aotrou F. BARBU, Eskob Kemper ha Leon.
 Kemper, d'ar 25 a viz ebrel I972.

+ Visant FAVE, eskob-skoazeller

Skoazellit ahanom, en eur gomananti da GAIEROU " KENVREURIEZ AR BREZONEG "

Aotrou Job SEITE, 29 N Guissény - C.C.P. I738-66 - RENNES

5 ved SUL FASK A

LENNADENN GENTA: Seiz dén, leun euz ar Spered Santel, dibabet da veza avielar.

LENNADENN EUZ LEVR OBEROU AN EBESTEL. 6/I-7

1. En deiziou-ze, dre ma kresket niver an diskibien, ar vreudeur a yez hresianeg,
a hrosmol a-eneb ar re a yez hebreeg.
Er zervij pemdezieg, e kave dezo, e veze dilezet an intañvezed euz o zud.
2. An daouzeg abostol eta, a halv d'eur vodadeg, an oll diskibien, hag a lavar dezo:
- N'eo ket deread deom dilezel on dever da brezeg, evid servicha ouz taol.
3. Klaskit kentoh, breudeur, seiz ahanoh, tud a vrud vad, leun euz ar Spered
Santel hag a furnez,
ha ni a fizio ar garg-se enno.
4. Deom-ni avad, rei on amzer da bedi ha da brezeg.
5. Kement-se a blij d'an oll, hag e oe dibabet: Stefan, eun dén leun a feiz ha
leun euz ar Spered Santel, Filip, Prokor, Nikanor, Timon, Parmenaz
ha Nikolaz, eur prozelit euz Antioch.
6. Digas a reont anezo dirag an ebestel;
ar re-mañ, goude beza pedet, a astenn warno o daouarn.
7. Komz Doue a houneze tachenn, niver an diskibien a yee kalz war gresk e Jeruzalem
ha beleien yuzeo ivez a zeue stank d'ar feiz.

SALM 32 /I-2,4-5,18-19

Diskan: Ho trugarez warnom, Aotrou Doue,
evel m'on-eus-ni fizianz ennoh.

1. Tridit gand ar joa, tud santel,
en enor d'an Aotrou;
ar veuleudi a zo deread d'an den just.
2. Meulit an Aotrou war an delenn,
kanit meuleudi dezañ war gitar.
4. An Aotrou Doue 'zo leal e lavar;
en e oll oberou eo fidel d'e hér (pe d'e bromesa).
5. Plijoud a ra dezañ beza reiz ha just;
gand madelez an Aotrou eo leun an douar-abez.
18. An Aotrou a bar e lagad war an dud a zouj anezañ,
war an dud a esper en e vadelez,
evid savetei o buez euz an Ankou,
19. ha rei bevañs dezo pa vez naonegez.

0000000000000000

EIL LENNADENN: C'hwi 'zo eur ouenn dud dibabet, eun urz roueela veleien.

LENNADENN EUZ LIZER KENTIA AN ABOSTOL SANT PER.2/4-9

4. Tostait ouz Jezuz, eñ hag a zo ar mên beo, bet taolet kuit gand an dud,
med dibabet gand Doue ha kavet mad gantañ.
5. C'hwi ivez, bezit evel mein beo, ma vo savet ganeoh eun templ spirituel,
a blijo da Zoue, ablamour da Jezuz Krist.
6. Hag er Skritur-Zakr, ez eus kement-mañ: setu ma lakañ e kêr Zion eur mên
euz an dibab, kavet mad da veza mên-korn;
an neb a fizio warnañ, n'e-no ket da gaoud kerze.
7. Deoh-c'hwi eta an enor, tud-a-feiz;
med evid an dud difeiz, ar mên bet taolet kuit gand saverien an ti,
hennez a zo deuet da veza ar mên-korn,
eur mên skoill, eur garreg hag a laka an dud da goueza;
steki a reont outi, rak ma ne gredont ket er Gomz,
ha kement-se a oa d'en em gaoud ganto.
9. C'hwi avad a zo eur ouenn dud dibabet, eun urz roueel a veleien,
eur vroad santel, eur bobl hag a zo da Zoue;
karget oh eta da embann oberou burzuduz an hini e-neus ho kalvet
euz an denvalijenn d'ar sklerijenn estlammuz.

SALUD D'AN AVIEL - Alleluia! Me eo an hent, ar wirionez hag ar vuez;
an neb a glask an Tad a dle tremen drezon. Alleluia!

AVIEL OR ZALVER JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN. I4/I-I2

Araog tremen euz ar bed-mañ daved e Dad, e lavar Jezuz d'e ziskibien:

- I. Na laoskit ket ho kalon da veza trubuillet;
kredi a rit e Doue, kredit ennon-me ivez.
2. E-barz ti va Zad ez eus meur a zemeurañs;
ma ne vije ket bet evel-se, am-befe lavaret deoh:
rag mond a ran da gempenn deoh ho plas.
3. Ha pa vin eet, ha p'am-bo kempennet deoh eur plas,
me a zeuio endro d'ho kemer ganin, evid ma vezoh c'hwi el leh m'emaon-me.
4. D'al leh ma'z an c'hwi a oar an hent.
5. Tomaz a lavar dezañ: "Aotrou, n'ouzom ket da beleh emaout o vond,
penaoz e ouezfem an hent?"
6. Jezuz a lavar dezañ: "Me eo an hent, ar wirionez hag ar vuez,
n'ez a dén d'an Tad, heb tremen drezon.
7. Peogwir eh anavezit ahanon, eh anavezit ivez va Zad.
A-vremañ eh anavezit anezañ, hag ho-peus e welet."
8. Filip a lavar dezañ: "Aotrou, diskouez deom an Tad hag e vo awalh evidom."
9. Jezuz a lavar dezañ: "Keid-all a zo, emaon ganeoh, ha ne anavezes ket ahanon,
Filip, an hini a wel ahanon a wel an Tad.
Penoaz e hellez-te lavared: diskouez deom an Tad,
ha ne gredez ket emaon en Tad hag an Tad ennon.
Ar homzou a lavarañ deoh, n'eo ket ahanon va unan eo e lavaran anezo;
an Tad a zo o chom ennon eo a ra e oberou dezañ."
- II. Ha ne gredez ket emaon-me en Tad hag ema an Tad ennon;
kredit da viana ablamour d'an oberou.
12. Ya, e gwirionez, m'henn lavar deoh; an hini a gred ennon, a raio, eñ ivez,
an oberou a ran,
ha re vrasoh zoken, peogwir ez an daved va Zad.

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue !

C'hwi eo a bedom, on Doue hag or Mestr,
ho peus digaset deom ar Zalver ha grêt ahanom ho pugale;
taolit 'ta eur zell madelezuz war ar re ho peus evito karantez eun Tad:
ablamour d'o feiz en Aotrou Krist,
grit dezo beva er frankiz gwirion
ha gounid ar vuez peurbaduz.

Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo (ha leun a hloar) ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken.

WAR AR PROVOU

Aotrou Doue, e Sakrifis an Overenn, e tigemerit or provou
hag e rit deom, en distro, kaoud perz en ho puez divin:
goulenn a reom diganeoh, pa 'z om deut da anaoud ho kwirionez,
ar hras da zelher stard dezi a-dreuz or buez penn-da-benn.

Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN!

GOUDE AR GOMUNION

Pedom Doue !

Aotrou Doue, chomit tost da bobl ho tud fidel,
ho peus digoret dezo feunteun ho sakramanchou:
grit dezo en em zistaga diouz plegou fall o natur,
(diouz o hoz natur)
evid kaoud dor zigor er vuez peurbaduz.

Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN!

6 ved SUL FASK A

LENNADENN GENTIA: Pêr ha Yann a astenn warno
o daouarn, evid m'o-defe ar Spered Santel.

LENNADENN EUZ LEVR OBEROU AN Ebestel. 8/5-8, 14-17

5. Filip, unan euz ar seiz avieler, a ziskenn en eur gêr euz Bro-Zamari,
hag en em laka da brezeg ar Hrist.
6. An oll a-unan a zelaou gand kalz a evez ar pezh a lavare Filip,
rag klevet a reont ober ano euz e vurzudou pe gweled a reont anezo.
7. Rag kalz tud, enno droug-sperejou, a veze dilivret,
hag ar sperejou fall a yee kuit anezo en eur yudal forz.
Kalz, seizet o izili pe dinerzet, a gawe ivez ar pare.
8. Braz e oe al levenez e kêr.
14. An ebestel, chomet e Jeruzalem, a glev o-doa tud ar Samari
reaset ar halou-mad, hag a gas Pêr dezo.
15. Digouezet er vro, ar re-mañ, a bed evid an dud,
evid ma resevfent ar Spered Santel,
16. rag n'eo ket c'hoaz diskennet war nikun anezo,
ne oant nemed badezet en ano an Aotrou Jezuz.
17. Neuze, Pêr ha Yann a astenn o daouarn warno hag e resevont ar Spered Santel.

SALM 65

I-3a, 4-5, 6-7a, 16, 20

diskan: Savom or mouez da veuli Doue !
Kanom meuleudi d'e Ano !

1. Savit ho mouez da veuli Doue, oll dud an douar,
2. kanit meuleudi d'e Ano, gloar hag enor dezañ.
- 3a Lavarit da Zoue: Pegen kaer hoh oberou, pegem braz ho kalloud!
4. Oll dud an douar a stou dirazoh, kana 'reont ho kloar,
kana 'reont gloar d'hoh ano.
5. Deuit ha gwelit oberou Doue;
kaer estlamm eo ar pezh e-neus greet evid mab-den.
6. Euz ar mor e-neus greet douar kalet,
treuzet o deus ar ster war o zroad,
ahano ez om bet laouen, ablamour dezañ,
- 7a rag dre e halloud eo mestr ar bed da virviken.
16. Deuit da zelaou, ma kountin deoh oll, tud a zoujañs Doue,
pegen kaer traou e-neus greet evidon.
20. Meuleudi da Zoue; n'eo ket chomet bouzar ouz va fedenn
ha n'e-neus ket dilamet diganin e vadelez.

EIL LENNADENN: Deom-ni da gompren talvoudegez poaniou ha maro ar Hrist.

LENNADENN EUZ LIZER KENTA AN ABOSTOL SANT PER. 3/15-18

15. Va breudeur, lakit doujañs santel evid an Aotrou Krist, en ho kalonou.
 16. Bezit prest atao da renta kont euz an esperañs a zo en ho kreiz
 da gement hini her goulenn diganeoh;
 gand douster avad, gand respet ha gand eur galon divlamm,
 evid ma vo, end-eeün war ar pezh a rebecher deoh,
 goloet a vez ar re a gav abeg er vuez vad a renit en Aotrou Krist.
 17. Rag gwelloc'h e ve, ma vefe bolontez Doue, gouzañv en eur ober ar mad
 eged en eur ober an droug.
 18. Ar Hrist a zo maro eur wech evid mad, evid or pehejou,
 eñ, an den just, evid ar beherien,
 evid or hiniig da Zoue, lakeet d'ar maro en e gorv,
 med er spered rentet d'ar vuez.

SALUD D'AN AVIEL. Alleluia Alleluia! An hini a gar ahanon, a viro va gourhemennou,
 eme or Zalver, va Zad a garo anezañ,
 ha dond a raim beteg ennañ. Alleluia !

AVIEL HOR ZALVER JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN. 14/15-21

- Araog tremen euz ar bed-mañ daved e Dad, e lavar Jezuz d'e ziskibien:
 15. - Ma karit ahanon, c'hwi a viro va gourhemennou.
 16. Me a bedo va Zad hag e roio deoh eur skoazeller all, evid chom ganeoh bepred;
 17. ar Spered a Wirionez.
 N'eo ket ar bed evid e reseo, o veza ma n'her gwel ket
 ha n'anavez ket anezañ;
 med c'hwi a anavez anezañ, rag ganeoh e chom hag ennoh ema.
 18. N'ho lezin ket emzivad; distrei a rin davedoh (d'ho kaoud).
 19. C'hoaz eur pennadig amzer, hag ar bed n'am gwelo mui,
 med c'hwi am gwelo beo ha c'hwi a vevo ivez.
 20. En deiz-se, e ouezoh emañ em Zad, ha c'hwi ennon ha me ennoh.
 21. An hini e-neus resevet va gourhemennou hag a vir anezo, hennez eo a gar ahanon.
 Hag an hini a gar ahanon a vo karet gand va Zad, ha me ivez a garo anezañ
 hag en em ziskouez dezañ.

PEDENN AN DIGOR.

Selaouit or pedenn, Aotrou Doue: ni hag a gred ema Jezuz Krist, Salver an dud,
 o vev en ho kichen e kreiz ho kloar,
 grit deom kompren ema ivez o chom ganeom, evel m'e-neus lavaret,
 beteg an deiz diweza euz ar bed: Eñ on Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken. AMEN.

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, war-eun-dro, gand ar provou-mañ,
 digemer pedennou ho pügale:
 an overenn-mañ, a lidom anezi gand or brasa karantez,
 ra heñcho ahanom warzu gloar ar baradoz. Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN.

GOUDE AR GOMUNION.

Ni ho ped d'or zelaou, Aotrou Doue:
 dre vertuz ar gomunion-mañ, grit deom kredi startoh ha gwelloc'h
 e teuo da wir menozioù ho karantez, evid korv an Iliz a-béz, kenkoulz ha m'eo grêt
 dija evid an hini a zo penn d'ar horv-se, Jezuz Krist, Or Zalver, Doue beo ganeoh....

7 ved SUL FASK A

LENNADENN GENTA: An ebestel, oll a-unan, a gendalh da bedi aketuz.

LENNADENN EUZ LEOR OBEROU AN EBESTEL. I/I2-I4

- I2. Goude ma oa pignet Jezuz d'an neñv, an ebestel a zistro da Jeruzalem euz Menez an Olived, nepell ahano, eun derveziad-bale, da zeiz ar zabad.
- I3. Erruet e kêr, e pignont er zal d'an neh, ma oant boaz d'en em voda enni.
Aze ema Pêr, Jakez, Yann, Andre, Filip, ha Tomaz, Bartelemi ha Maze, Jakez, mab Alfe, Simon ha Jud, mab Jakez.
- I4. Oll a-unan, e talhont da bedi aketuz, gand eun neubeud merhed,
en o zouez Mari, mamm Jezuz ha gand e vreudeur.

SALM 26 /I-4, 7-8a

diskan: Sklerijenn ha silvidigez
eo an Aotrou evidom.

- I. Va sklerijenn ha va zilvidigez eo an Aotrou;
rag euz piou am-mo aon ?
Moger-divenn va buez eo an Aotrou;
dirag piou e krenin ?
- 4. Eun dra am eus c'hoant bras da gaoud,
a houlenman digand Doue:
mond da jom da di an Aotrou Doue,
epad va oll amzer.
Eun drugar vo din peoh an Aotrou Doue,
hag eun dudi gwelout e zantual.
- 7. Se'laouit, Aotrou Doue!
Euz va oll mouez ho kalvan;
kemerit truez ouzin ha respontit din.
- 8. Ouzoh e komz va halon, c'hwi eo a glaskan.

EIL LENNADENN. Ma vezit dismeganset ablamour d'ar Hrist, eüruz oh-c'hwi !

LENNADENN EUZ LIZER KENTA AN ABOSTOL SANT PER. 4/I3-I6

- I3. Hervez ar perz a gemerit e poaniou ar Hrist, bezit leun a levenez,
evelse c'hwi a drido gand ar joa hag al levenez, pa skedo e hloar.
- I4. Ma vezit dismeganset ablamour d'ar Hrist, eüruz oh-c'hwi,
pec wir ema o plava warnoh ar Spered a hloar, Spered Doue.
- I5. Ma vez gwasket hini pe hini ahanoh, arabad e-vefe evid beza lazet,
pe laeret, pe greet eun taoñ fall bennag, pe evid beza diskuillet ar re all,
dre fallagriez.
- I6. Med, mard eo evel kristen, arabad dezañ kaoud mez;
dezañ neuze renta gloar da Zoue, evid an ano-ze a gristen.

00000000000000000000

SALUD D'AN AVIEL. Alleluia! Alleluia! N'ho lezin ket emzivad,eme or Zalver,
mond a ran,med distrei a rin davedoh,
ha c'hwi a drido gand ar joa.Alleluia !

AVIEL OR ZALVER JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN.I7/I-IIa

- I. Araog tremen euz ar bed-mañ daved e Dad,Jezuz,e zaoulagad savet warzu an neñv,
a bed evelhem:"Tad,deuet eo an eur,roit gloar d'ho mab,
evid ma roio ho mab gloar deoh-c'hwi.
2. Hag evel m'ho peus roet dezañ galloud war beb den,
ma roio ar vuez peurbaduz da gement hini ho peus roet dezañ.
3. Hogen ar vuez peurbaduz eo kement-mañ:
ma 'h anavezint ahanoh,c'hwi a-neus Doue gwirioñ nemedoh
ha ma 'h anavezint an hini ho peus digaset:Jezuz Krist.
4. Roet am eus gloar deoh war an douar,kaset am eus da benn al labour
ho poa fiziet ennon.
5. Ha deoh-c'hwi bremañ Tad eo da rei din,en ho kichenn,gloar,
ar hloar a oa din-me en ho kichenn,araog ma 'z oa euz ar bed.
6. Roet am eus hoh ano da anaoud d'an dud ho peus tennet euz ar bed
evid o rei din.Deoh e oant,hag ho peus roet anezo din.
Miret o deus ho Komz.
7. Gouzoud a reont bremañ eo diganeoh e teu kement ho peus roet din,
8. rag ar homzou ho peus fiziet ennon,am eus roet dezo;
o digemeret o deus ha diskleriet eo gwir ez oun deuet ahanoh,
ha kredet o deus ez eo gwir ho peus va digaset.
9. Me a bed evito,ne bedan ket evid ar bed,med evid ar re ho peus roet din,
rag deoh ez int.
- IO. Kement a zo din a zo deoh,ha kement a zo deoh a zo din,
ha va gloar a gavan enno.
- II. N'emenn ket mui er bed,med inti a zo er bed,endra ma 'z an davedoh.

PEDENN AN DIGOR.

Pedem Doue !

Selaout or pedenn,Aotrou Doue:

ni hag a gred ema Jezuz Krist,Salver an dud,
o veva en ho kichenn e kreiz ho kloar,
grit deom kompren ema ivez o chom ganeom,evel m'e-neus lavaret,
beteg an deiz diweza euz ar bed:
Eñ on Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. AMEN.

WAR AR PROVOU.

Plijet ganeoh,Aotrou Doue,war-eun-dro,gand ar provou-mañ,
digemer pedennou ho pugale:
an overenn-mañ,a lidom anezi gand or brasa karantez,
ra heñcho ahanom warzu gloar ar baradoz.
Dre Jezuz Krist,Or Zalver. AMEN !

GOUDE AR GOMUNION.

Ni ho ped d'or zelaou,Aotrou Doue:

dre vezuz ar gomunion-mañ,grit deom kredi startoh ha gwelloh
e teuo da wir menoziou ho karantez evid korv an ILiz a-béz,
kenkouiz ha m'eo greet dija evid an hini a zo penn d'ar horv-se,J.K.Or Zalver,Doue...

9^{ve}d SUL ORDINAL A

LENNADENN GENTIA: Da zibab on-eus etre bennoz ha malloz.

PENNAD EUZ LEVR AN NIVEROU. II/18.26-28

18. Moizez a gomzas evelhenn ouz ar bobl:
 - Lakit en ho kalon hag en hoh ene ar homzeu-mañ,
 ha stagit anezo ouz ho torn evel eur zin
 ha dougit anezo war ho tal.
26. Gwelit, hirio e roan deoh da zibab etre bennoz ha malloz.
27. Bennoz, ma virit lezennou ho Toue a gemennan deoh hirio.
28. Malloz avad, ma tizentit ouz gourhemennou ho Toue,
 ma tehit diouz an hent a gemennan deoh hirio,
 evid senti ouz doueou faoz ha ne anavezit ket.

SALM 30. 2-3a, 3bc-4, 17-25

- diskan: Warzu ennoh e savan va ene. (gweloud: BREIZ A GAN N°5, pajenn 3)
 Va oll fiziañs 'zo ennoh, va Doue !
2. Ennoh, Aotrou Doue, e kavan va repu;
 grit n'am bo ket da gaoud mez;
 en ho justis, deuit d'am zikour.
- 3a. Troit ho skouarn warzu ennon,
 hastit buan va savetei.
 Bezit evidon eur roh da rei din repu,
- 3bc. eur hastell, ma vin ennañ e savete.
4. Ablamour d'hoh ano, va hentchit ha va harpit.
17. Taolit war ho servicher eur zell a garantez;
 deuit d'am zavetei dre ho kras.
25. Dalhit mad ha bezit kaloneg,
 c'hwi oll hag a laka ho fiziañs en Aotrou.

EIL LENNADENN: Dre ar feiz eo e vez santelleët an den ha n'eo ket dre al lezenn.

LENNADENN EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT Paol da gristenienKER ROM. 3/21-25a, 28

21. Bremañ, er mez euz al lezenn, justis Doue a zo en em ziskouezet;
 al lezenn hag ar brofeted a zoug testeni dezi:
22. justis Doue deuet dre ar feiz e Jezuz Krist, evid kement hini a gred;
 rak n'eus kemm ebed:
23. oll o deus pehed, oll o deus kollet gloar Doue.
24. Med just int bremañ, dre hraz Doue, heb na ve koustet netra dezo,
 dasprenet ma 'z int bet en Aotrou Krist.
- 25a. Eñ eo e-neus Doue dibabet da veza an hini a hounid ar pardon dre e wad,
 dre ar feiz;
28. ha kaoud a ra deom e teu an den da veza santelleët dre ar feiz,
 ha n'eo ket dre al lezenn.

SALUD D'AN AVIEL.

Alleluia ! Alleluia ! Da gomzou, Aotrou, a zo buhez ha spered;
Ganez ema komzou ar vuez peurbaduz. Alleluia !

AVIEL OR ZALVER JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE. 7/21-27

- II. N'eo ket o lavaret din: "Aotrou, Aotrou, eo ez eer e Rouantelez an Neñv,
med oh ober bolontez va Zad a zo en Neñv.
22. Kalz a lavaro din, en deiz-se: "Aotrou, Aotrou,
daoust ha n'eo ket eh da ano eo on-neus komzet,
en da ano on-neus argaset an droug-spered,
en da ano on-neus greet burzudou ?
23. Neuze e respontin dezo: "N'em-eus biskoaz hoh anavezet,
it pell diouzin, c'hwi hag a a ra an droug.
24. Evelse, an hini a zelaou va homzou, hag a heuill anezo
a zo heñvel ouz eun den a skiant vad, savet ti gantañ war ar garreg;
25. ar glao a zo kouezet, an dour-beuz a zo dirollet,
an aveliou o deus c'houezet gand kounnar war an ti:
n'eo ket kouezet en e boull, diazezet oa war ar roh.
26. Med an den a selaou va homzou, ha ne zent ket outo,
a zo heñvel ouz eun den diskiant e-neus savet e di war an trêz:
ar glao a zo kouezet, eur pill dour 'zo deuet,
an aveliou 'zo savet hag o deus c'houezetwar an ti.
Koueza 'ra en e boultr hag an den a goll peb tra.

PEDENN AN DIGOR.

Aotrou Doue, Tad Oll-halloudeg,
c'hwi hag a vez dalhmad war evez ahanom,
pellañt diouzm, ni ho ped, kement droug a zo
ha roñt deom kement a hell or zikour.

Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU.

Aotrou Doue, dond a reom d'hoh aoter,
leun a fiziañs en ho karantez,
evid kinnig deoh ar provou;
ra vezim gand sikour ho kras, gwalhet ha kennerzet,
dre an Overenn emañ o lida.

Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

GOUDE AR GOMUNION.

Pedem oll a-unan !
Hentchit ahanom, Aotrou Doue, dre ho Spered Santel,
c'hwi hag ho peus roet deom korv ha gwad ho Mab,
evid ma hellim beza test deoh en or homzou hag en on oberou,
hag evelse kaoud perz en ho Rouantelez.

DRE Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

IO ved SUL ORDINAL A

LENNADENN GENTA: N'eo ket lidou ha pedennou hebken eo a houlenñ Doue diganeom,
med or halon leun a garantez.

LENNADENN EUZ LEOR AR PROFED OZEA. 6/3-6

3. Ar yuzevien a lavare kenetrezo:

- Poanion da anaoud an Actrou Doue;
dond a ray ken sur ha ma teu goulou-deiz.
Vad a ray evel eur barr glac, evel glaoeier an nevez amzer
o koueza war an douarou.

4. Doue a respont:

- Petra 'rin evidout Efraïm, ha petra 'rin evidout, Juda ?
Ho karantez 'zo evel mogidel ar mintin, ne bad ket,
hag evel glizenn ar beure hag a deus ken buan.

5. Ha setu perag, dre ar Brofeted, on bet kriz-ouzo,

hag em-eus ho kwallgaset gand va homzou.

6. Rag ar pezh a glaskan eo ar garantez, ha n'eo ket ar zakrifisou,
anaoudegez Doue ha n'eo ket ar zakrifisou peurlouez.

SALM 49.

I, 8, 12-13, 14-15

diskan: An den a blijo da Zoue an Tad,
a zo diwallet ha diwallet mad.

1. Doue, Mestr ar bed, e-neus bodet an oll dud,
euz ar sav-heol, betek ar huz-heol ha lavared:

8. - Selaou, va fobl, emezañ,
ne rëbechan ket dit beza dilezet ar zakrifisou,
rag dalhmad emaint dirag va daoulagad.

12. M'am efe naon ne lavarfen ket dit,
rag din eo ar bed ha kement a zo.

13. Daoust ha debri a ran kig ar holeou ?
Daoust hag eva a ran gwad ar meat ?

14. Kinnig da Zoue ar zakrifis a veuleudi
ha dalh d'ar bromesaou greet ganez dezañ;

15. neuze da zeiz an enkrez, deus d'am gelver,
me da zizammo hag e renti gloar din.

EIL LENNADENN: Feiz ar hristen a den^m da feiz Abraham.

Ni a gred en hini a ra deom sevel a varo da veo, evel ma kredas
Abraham e komzou Doue.

LENNADENN EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL D'AR ROMANED. 4/18-25

18. Harpet war an esperañs dreist da beb douetañs, Abraham e-neus bet feiz,
hag evelse eo deuet da veza tad eun niver braz a boblou(dud),
hervez komzou an Actrou: "Setu pebez lignez e vo da hini."

19. Pa deu da sonjal en e gorr tost d'ar maro-war-dro kant vloaz e-noa -
hag e korr Sara disehet, e talh fiziañs koulskoude.

20. Pa reas Doue e bromesa dezañ, ne gouezas warnañ na douetañs na nehamant, hag e kavas nerz en e feiz hag e rentas gloar da Zoue,
21. o veza ma krede stard edo^e galloud Doue seveni e bromesa.
22. Hag evel a lavar c'hoaz ar Skritur: "Abalmour d'e feiz e-neus lakeet Doue anezañ e stad a hraz.
23. Koulskoude n'eo ket evid Abraham hebken eo bet skrivet kement-mañ:
"Lakeet e oe e stad...",
24. med evidom-ni ivez, rag Doue on disklerio just, ni ivez, pegwir e kredom ennañ, eñ hag e-neus adsavet, a douez ar re varo, Jezuz, on Aotrou,
25. bet gwerzet evid or pehejou ha savet da veo, evid or Zilvidigez.

SALUD D'AN AVIEL

Alleluia! Alleluia ! Ar Hrist a zo en em hrêt den. En on touez e-neus bevêt.
Dreizañ, e teuint da veza bugale da Zoue ar re oll en digemer.
Alleluia !

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE. 9/9-13

9. O kuitaad Kafarnaum, Jezuz a wel e ti ar bublikaned,
azezet ouz e vureo, eun den anvet Maze.
Jezuz a lavar dezañ: "Deus d'am heul!"
An den a zav en e zav hag a ya d'e heul.
10. Epad m'edo ouz taol, en ti, e teu kalz publikaned ha peherien
da gemered plas gantañ hag e ziskibien.
11. O weled kement-se, ar farizianed a lavar d'an diskibien:
- Penaoz eta e hell ho mestr debri gand publikaned ha peherien.?
12. Jezuz a glev hag a respont:
- N'eo ket an dud yac'h eo o deus ezomm medesin, med ar re glañv.
It da zeski petra dalv ar homzou-mañ: N'eo ket provou eo a glaskañ,
med karantez; n'on ket deuet da helver an dud just med ar beherien.

PEDENN AN DIGOR.

Pedom Doue !
Aotrou Doue, diganeoh eo e teu kement mad a zo,
ha setu ar hraz a houlennom digand ho largentez:
lakit da zevel ennom ar zonj hag ar hoant euz ar pezh a zo mad da ober,
hag heñchit ahanom, evid kas da benn ar zonjou santel-se.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh hag gand ar Spered Galn,
a oll viskoaz da virviken.

WAR AR PROVOU.

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, taoler ho sellou
warnom ha war an overenn emañ o lida evid ho servij:
ma vo or provadenn digemeret mad ganeoh,
ha ma talvezo deom en distro ho skoazell en or zempladurez.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

GOUDE AR GOMUNION.

Aotrou Doue, evel eur medesin mad, e tigasit deom ar pare,
dre ar Zakrifis Santel hag ar Gomunion: grit eta ma vim dieübet euz on techou fall
ha douget da ober bepred ar pezh a zo mad. DRE Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

II ved SUL ORDINAL A

LENNADENN GENTA: Me a reio ahanoh eur Rouantelez beleien, eur bobl santel.

LENNADENN EUZ EIL LEVR MOIZEZ. 19/2-6a

2. Tri miz goude beza kuiteet an Ejipt, ar Yuzevien eet euz Refidim a zigouez e dezerz ar Sinaï.
Chom a reont a-zav eno (chom a reont heb mond pelloh) en dezerz-se, dirag ar menez.
3. Moïzez a bign warzu Doue.
An Aotrou a halv anezañ diwar lein ar menez:
- An dra-mañ a lavari da vugale Jakob hag a roi da anaoud da bobl Israel:
4. - Gwelet ho peus ar pezh am eus greet da vro Ejipt,
penaoz em eus ho sammet evel war diouaskell eun erer,
evid ho tigas beteg ennon.
5. Bremañ, ma klevit va mouez ha ma talhit d'an emgleo greet ganin,
e vezoh va fobl muia karet e-touez an oll boblou - rag din-me eo an douar a bez.
- 6a. Me a reio ahanoh eur rouantelez beleien, eur bobl santel.

SALM 99. 2,3,5

diskan: Ni'zo pobl an Aotrou Doue,
an deñved renet gand e zorn.

2. Kanit, laouen, enor d'an Aotrou Doue, dre ar bed a-béz,
deuit da zervij an Aotrou gand levenez,
antreit dirzañ gand ho kalon o tridal.
3. Sonjit mad ez eo an Aotrou ar gwir Doue;
eñ e-neus greet ahanom, ha ni 'zo dezañ,
bez 'om e bobl hag an deñved renet gantañ.
5. Ya, mad eo an Aotrou Doue: da viken e pado e vadelez,
hag a rumm da rumm eo fidel d'e hēr. (ne dorr e hēr)

EIL LENNADENN: Lakeet e peoh gand Doue, dre varo Or Zalver,
ni a vo saveteet dre e vuez dezañ.

LENNADENN EUZ LIZER SANT PAOL D'AR ROMANED. 5/6-II

6. Breudeur, d'ar mare ma 'z oam c'hoaz dinerz, neuze, d'an eur merket gand Doue, e varvas ar Hrist evidom, peherien.
7. Asanti mervel evid eun den just a zo diêz, med marteze, evid eun den a galon,
ez afed beteg rei ar vuez.
8. Amañ, eo e tiskouez Doue e garantez evidom:
maro eo ar Hrist evidom, d'ar mare ma 'z oam c'hoaz peherien.
9. kent a-ze eta, bremañ, pa 'z om deuet da veza just dre wad ar Hrist,
e vezim diwallet gantañ a-eneb kounnar Doue.
10. Peogwir, pa 'z oam enebourien dezañ, ez om bet lakeet e peoh gand Doue,
dre varo e vab, kent a-ze ivez, bremañ, p'emaom e peoh gantañ,

e vezim saveteet dre vuez ar Hrist.

II. Gwelloc'h c'hoaz, or gloar a lakeom e Doue, dre Or Zalver Jezuz Krist
e-neus on lakeet bremañ dija e peoc'h gand Doue.

SALUD D'AN AVIEL.

Alleluia ! Alleluia ! An deñved a zelaou va mouez, eme Or Zalver,
me a anavez anezo, hag e teuont d'am heul. Alleluia !

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE. 9/36-10/8

36. O weled ar bern tud a oa, Jezuz e-noe truez outo,
rag skuiz ha fallgalonet ez oant evel deñved heb pastor.
37. Neuze e lavar d'e ziskibien:
- Braz eo an eost; an eosterien avad a zo neubeud anezo.
38. pedit eta mestr an eost ma kaso eosterien war e eost.
- 10/I. Gervel a ra neuze e zaouzeg diskibl hag e ro dezo galloud
war an droug-sperejou, evid gelloud o has kuit
ha rei ar pare euz n'eus forz peseurt kleñved pe zempladurez.
2. Ha setu amañ anoiou an daouzeg abostol: ar henta, Simon anvet Pêr
hag Andrev e vreur, Jakez, mab Zebede hag e vreur Yann,
3. Filip ha Bartelemi, Tomas ha Maze ar publikan,
Jakez, mab Alfe ha Tadde,
4. Simon ar Hananean ha Judas Iskariod an hini end-eeun a dlee gwerza Jezuz.
5. Goulenn a ran diganeoc'h, emezañ, chom heb mond warzu ar bayared,
nag e kêr ebed euz ar Samari.
6. It kentoc'h warzu an deñved kollet euz pobl Israel.
7. Dre ma 'z eoc'h, roit da anaoud d'an oll ema tostig rouantelez an Neñv.
8. Roit ar pare d'ar re glañv, tennit o lorgnez digand an dud lor,
roit ar vuez d'ar re varo.
- Argasit an droug-sperejou. Resevet ho peus evid netra, roit ivez evid netra.

PEDENN AN DIGOR.

Aotrou Doue, mammenn a nerz d'ar re a esper ennoh,
selaouit or pedennou gand madelez: + pa ouzoc'h ne hell mab-dén ober netra hebdoh,
roit deom sikour ho kras, evid heulia ho kourhemennou,
ha plijoud deoc'h a galon ha dre on oberou.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou,
Doue beo ganeoc'h gha gand ar Spered Glan, o oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU.

Aotrou Doue, gand ar provou 'zo amañ, bara ha gwin, e roit d'an dud,
ouspenn o magadurez er vuez-mañ, danvez ar Zakramant a vag enno ar vuez nevez: +
plijet ganeoc'h ma n'o do morse diouer nag evid o horv hag evid o ene.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

GOUDE AR GOMUNION.

Salver Jezuz, evel ma 'z eo ar Gomunion resevet ganeoc'h eur zin da verka
unaniez ar gristenien ennoh, +
grit ma lako ivez en hoc'h iliz unaniez stard ha gwirion.

Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

I2 ved SUL ORDINAL A

LENNADENN GENTA : En desped d'e enebourien, e kendalh Jeremias da embann ar wirionez.
E fiziañs a zo e Doue, rag Doue a zalh de her.

LENNADENN EUZ LEVR AR PROFED JEREMIAZ. 20/10-I3

- IO. Me, Jeremias am eus klevet ar bobl o vallozi warnon:
- Diskuillit anezañ, deom d'e ziskuill, eñ ha ne wel nemed spont e peb leh.
Va mignoned zoken a zo war hed ma teufen da fazia, hag a lavar: Marteze e hellim
deseo anezañ...dond a raim a-benn, hag e vezim treh warnañ d'on tro.
- II Med ganin ema an Aotrou Doue, evel eur brezellour nerzuz;
trehet ha dinerzet e vezint ar re a ra brezel din.
Pa vezint trehet e vo braz o mez, eur vez hag a bado ato,
ha ne vo morse ankounac'het.
- I2. Aotrou Doue, mestr ar bed, c'hwi hag a oar mad petra eo an den leal,
c'hwi hag a lenn e goueled ar halonou,
diskouezit din penaoz e tennoh venjañs anezo,
rag etre ho taoauarn em eus lakeet va buez.
- I3. Meulit an Aotrou, alleluia, rag tennet e-neus ar paour-kêz euz krabanou
(skillfou) an dud fall.

SALM 68.

8-10, 14-17, 33-34

diskan: Warzu ennoh, Aotrou Doue,
e sav hirio va fedenn.

8. Hag ablamour deoh eo em-eus bet mez,
hag em-eus bet da ruzia.
9. Deuet on da veza evel eun estren evid va breudeur
hag eun den dianav evid bugale va mamm.
- IO. Kollet on bet gand tan va harantez evid ho ti;
warnon e kouez an dismegans greet deoh.
- I4. Warzu Ennoh, Aotrou, e sav hirio va fedenn,
- I7. selaouit ouzin, C'hwi ha n'oh nemed karantez;
en ho trugarez vraz, taolit warnon ho sellou.
33. An dud keiz a welo kement-se hag e vint laouen.
C'hwi hag a glask Doue, yehed deoh ha levenez !
Ya, an Aotrou a zelaou ar re baour;
ne ra ket faë war dud ar bobl, er jadennoù.

EIL LENNADENN: Barnet om d'ar maro; arabad deom serri on daoulagad.
Arabad deom kenneubeud koll nerz kalon. Ar ger diweza
a jomo gand gras Doue.

LENNADENN EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL D'AR ROMANED. 5/12-I5

- I2. Dre eun den hebken, Adam, eo deuet ar pehed er bed,
ha dre ar pehed ar maro;
evelse ar maro e-neus taget an oll dud, dre m'o deus oll pehet.

13. Araoh Lezenn Moizez, ar pehed a oa dija er bed.
A dra zur, lavaret e vez, ar pehed ne hell ket beza rebechet
pa ne vez lezenn ebed,
ha koulskoude azalc'h Adam betek Moizez, ar maro e-neus greet reuz,
zoken war ar re n'o doa ket pehet,
o tizenti, evel Adam, en hag a oa ar skeudenn euz an hini a dlee dond.
14. Kemm a zo etre donezon gras Doue ha levezon ar pehed.
15. Rag m'e-neus ar maro skoet an oll dud dre behed unan hebken,
gras Doue he deus kalz muioh karget an oll dud;
eur hras eo roet en eun den hebken: Jezuz Krist.

SALUD D'AN AVIEL.

Alleluia ! Alleluia ! Komzit, Aotrou Doue, ni ho ped,
ho servijerien a zo ouz ho selaou,
ganeoh ema komzou ar Vuez peurbaduz. Alleluia !

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE. IO/26-33

26. Jezuz a lavare d'e ziskibien:
- N'ho pezet ket aon rag an dud, n'eus netra kuzet,
ha na zeufe ket da veza anavezet, netra en denvalijenn
ha na zeufe ket er sklerijenn.
27. Ar pez a lavarañ deoh en denvalijenn, henn lavarit er sklerijenn,
hag ar pez a lavarañ deoh e pleg ho skouarn,
henn embannit diwar an toennou.
28. N'ho pezet ket aon rag ar re a laz ar horv,
han n'hellont ket laza an ene;
ho pet aon kentoh rag an hini a hell kas da goll ar horv
koulz hag an ene.
29. Daoust ha ne vez ket kavet daou labousig evid eur gwenneg ?
Ha koulskoude hini ebed anezo ne gouez war an douar heb aotre ho Tad.
30. Ha c'hwi, kement blevenn a zo war ho penn a zo kontet oll.
31. Bezit eta dienkreiz, talvezoud a rit c'hwi muioh eged oll laboused ar bed.
32. An hini a zisklerio dirag an dud beza a du ganin,
me d'am zro a zisklerio dirag va Zad beza a du gantañ.
33. Med kement hini am naho dirag an dud, me ivez hen naho dirag va Zad a zo en Neñv.

PEDENN AN DIGOR.

Grit deom, Aotrou Doue, kaoud bepred doujans ha karantez evidoh,
pegwir n'ehanit morse da heñcha en o buez
an dud a stagit ouzoh gand liamm stard ho karantez.
Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou, Doue beo ganeoh ha gand ar Spered
Glan a oll viskoaz da virviken. Amen !

WAR AR PROVOU.

Plijet ganeoh, Aotrou Doue a drugarez, ober deom digemer vad, + pa zeuom a wir galon
da ginnig deoh ar Sakrifis a beoh hag a veuleudi. Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

GOUDE AR GOMUNION.

Goude beza kinniget deoh, e Sakrifis, Korv ha Gwad Or Zalver ha beza e resevet,
e teuom d'ho pedi c'hoaz, Aotrou Doue: + saveteet da viken, ra gavim da vad, en eürus-
ted ar baradoz, ar madou, n'on eus anezo nemed an tañva dre ar feiz. Dre Jezuz Krist...

I3^{ve}d SUL ORDINAL A

LENNADENN GENTA: An hini a ra e ziskenn en on ti a zo eun den a Zoue.

LENNADENN EUZ LEVR AR ROUANED. 2R/4-II, I4-I6a

8. Eun dervez, p'edo ar profed Elizeaz o tremen dre gêr Zunam,
e teu eur vaouez a renk uhel euz ar vro,
da bedi anezañ da zond da breja en he zi.
Diwar neuze, bewech ma tremene dre eno e rea e ziskenn en he zi.
9. Ar vaouez a lavar d'e fried:
- Gwel, gouzoud a ran eo eun den a Zoue an hini a ra e ziskenn amañ atao;
10. savom dezañ eur gambr vian war leur-doenn an ti, hag e lakim enni:
eur gwele, eun daol, eur skaoñ hag eul lamp,
ha pa zigouezo e hello en em denna eno.
11. Eun dervez e teu Elizeaz hag en em denn da gousked er gambr-ze,
14. Laved a ra d'e zervicher:
- Petra 'hellfed ober evid ar vaouez-se ?
- Siwaz dezi, eme ar servicher, n'he deus mab ebed,
hag e fried a zo deuet war an oad.
15. - Galv anezi, eme Elizeaz, .
Ar servicher a halv anezi hag hi a zeu, da doull an nor.
16. Elizeaz a lavar dezi:
- Er bloaz a zeu, d'ar mare-mañ, az pezo eur mab da zougen war da vreh.

SALM 88

2-3, I6-I7, I8-I9

diskan: An Aotrou eo va divennour;
ra jomo e sklerijenn dirazom.

2. Madeleziou an Aotrou Doue a ganin-me da viken;
a rumm da rumm eh embannin pegen feal oh d'ho kêr.
3. Hen lavaret am eus; da viken eo diazezet ho madelez;
war an neñvou eo harpet stard ho fealded.
10. Evuruz ar bobl a oar kana laouen ho meuleudi !
Aotrou Doue, ouz sklerijenn ho fas e kerzont;
17. gand hoh ano e tridont ahed an deiz,
gand ho santelez peurvad ez eus lorch enno.
18. Ha dre ho sikour ez a war gresk or galloud.
19. Ya, an Aotrou a zo on divennour
hag or Roue eo sant Israël.

+++++

EIL LENNADENN : Sebeliet om bet a-unan gand ar Hrist,dre ar Vadiziant,
evid ren eur vuez nevez.

LENNADENN EUZ LIZER SANT PAOL D'AR ROMANED. 6/3-II

3. Va breudeur,her gouzoud a rit,ni oll hag a zo bet badezet,
er Hrist ez om bet badezet.
4. Sebeliet om bet a-unan gantañ,dre ar Vadiziant en e varo,
evid ma teufem da ren ni ivez eur vuez nevez,
evel ma 'z eo adsavet da veo an Aotrou Krist,dre halloud skeduz an Tad.
5. Rag,mar dom deuet da veza unan gantañ dre eur maro heñvel ouz e hini,
e vezim ivez unan gantañ dre eun adsao da veo heñvel ouz e hini.
6. Her gouzoud mad a reom:ar sklavour d'ar pehed ma 'zom,a zo bet staget war groaz,
war eun dro gantañ,evid ma vefe distrujet an natur-se a behed
ha na vefem mui dindan sklavaj ar pehed.
7. Rag an neb a zo maro a zo dilivret diouz ar pehed.
8. Med,ma 'z om tremenet dre ar maro gand ar Hrist,
e kredom e vevim ivez gantañ
9. Rag,her gouzoud a reom: ar Hrist savet a varo da veo ne varv mui;
ar maro warnañ n'e-neus mui a halloud.
10. Rag marvet eo,med d'ar pehed eo ez eo marvet eur wech evid mad;
e vuez,bremañ,a zo eur vuez evid Doue.
- II. Evelse,c'hwi ivez,lakit en ho spered ez oh maro d'ar pehed,
hag ez oh beo evid Doue e Jezuz Krist.

SALUD D'AN AVIEL

Alleluia ! Alleluia ! Ra vo benniget en Ano an Aotrou,
an Hini a zeu,Or Roue,
peoh en Neñvou ha gloar d'an Uhel-meurbet ! Alleluia !

AVIEL JEZUS KRIST HERVEZ SANT VAZE. IO/37-42

37. Jezuz a lavare d'e ziskibien:
- An neb a gar e dad pe e vamm muioh egedon,n'eo ket din ahanon.
An neb a gar e vab pe e verh muioh egedon,n'eo ket din ahanon.
38. An neb ne zamm ket e groaz evid dond d'am heul n'eo ket din ahanon.
39. An neb a fell dezañ savetei e vuez a gollo anezi.
40. An neb a ro digemer deoh a ro digemer din va-unañ,
hag an neb a ro digemer din a ro digemer d'an hini e-neus va digaset.
41. An neb a ro digemer d'eur profed;egiz profed,e'no digoll eur profed,
an neb a zigemer eun den just,egiz den just,e-no digoll eun den just.
42. An neb a roio da eva,pa ne ve nemed eur werennad dour fresk da unan euz
euz ar re vian-mañ,ablamour ma 'z eo diskibl din,ne jomo ket heb
beza digollet.

PEDENN AN DIGOR: Aotrou Doue,c'hwi hag a lak an oll gristenien da gaoud ar memez
bolontez: + grit deom kared ho kourhemennou ha c'hoantaad ar ma-
dou a brometit,hag evelse,tra ma vez peb tra o trei er bed-mañ,chom heb distaga or
halonou euz bro ar wir levenez. Dre Or Zalver Jezuz Krist,ho Mab hag on Aotrou,Doue..

WAR AR PROVOU: Digemerit gand madelez,Aotrou Doue,ar provou a ouestlom deoh,+ ha grit
ma teuo deom diwarno peb gras ha peb skoazell da viken. Dre J.K.Or Z.

GOUDE AR GOMUNION: Maget gand eur zakramant ken dispar,ni ho ped,Aotrou Doue;+ grit
ma kavim ennañ donezonou a zilvidigez,ha ma ne skuizim morse o rei
deoh meuleudi.Dre Jezuz Krist,Or Zalver. Amen !

I4 ved SUL ORDINAL A

LENNADENN GENTA: Setu ho roue o tond war-zu ennoh, eur roue izel a galon.

LENNADENN EUZ LEVR ZAKARIAZ. 9/9-10

9. Lez da galon da dridal, merh Sion,
ha te, merh Jeruzalem laosk youhadennou a joa,
ema da roue o tond war-zu ennout,
eur roue leal, gantañ an treh,
humbl, hag azezet war eun azenn, eun azenn yaouank.
10. Kas a ray kuit ar hirri brezel euz Bro Efrain,
hag ar hezeg euz kêr Jeruzalem.
Torret e vo gantañ ar wareg brezel,
hag embannet ar peoh e peb bro,
eñ a reno euz eur mor d'egile,
euz ar Ster beteg ar penn pella euz ar bed.

SALM I44

I-2, IO-II, I3-I4

diskan: Kanom oll da viken, (ton: Meulom oll...)
meuleudi da Vestr ar Bed !

- I. Ho meuli a fell din, va Doue, O Roue, ha benniga hoh ano da viken.
2. Kana meuleudi deoh bemdez, meuleudi d'hoh ano da viken.
8. Truezuz ha trugarezuz eo an Aotrou, difonn da vond e konnar ha leun a vadelez.
9. Mad eo an Aotrou e-kenver an oll, ha trugarezuz evid e oll grouadurien.
10. C'hwi vo meulet, Aotrou, gand an oll grouadurien, hag ho tud fidel ho pennigo.
- II. Displega 'raint gloar ho rouantelez, skigna 'raint brud ho kalloud.
- I3. Gwirion eo an Aotrou en e gomzou, karantezuz en e oll oberou,
- I4. harpa a ra an Aotrou ar re a gouez, ha lakaad eeun ar re grommet.

EIL LENNADENN : Ma teuit dre nerz ar Spered da rei ar maro d'an natur fall
a zo ennoh, c'hwi a vevo.

LENNADENN EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL D'AR ROMANED. 8/9, II-I3

9. Va breudeur, c'hwi avad, n'oh ket renet gand an natur fall,
med gand ar Spered,
peogwir ema Spered Doue o veva ennoh.
Ar re n'o deus ket Spered an Aotrou Krist,
n'emañ ket en e gerz.

- II. Ha ma vev ennoh Spered an hini e-neus savet Jezuz a douez ar re varo,
hennez hag e-neus savet Or Zalver Jezuz a varo da veo,
a roio buez ive d'ho korvou sujet d'ar maro,
dre e Spered a zo o veva ennoh.
12. Dleour om eta, va breudeur, med n'eo ket d'on natur fall evid ma vefe red deom
beva hervez an natur-se.
13. Rag ma vevit hervez an natur fall, c'hwi a varvo;
med ma hellit rei taolar maro dezi dre nerz ar Spered,
c'hwi a vevo.

SALUD L'AN AVIEL.

Alleluia ! Alleluia! Meuleudi deoh, Mestr ar Bed,
d' ar re vian e roit da anaoud misteriou ar Rouantelez. Alleluia!

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE. II/25-30

25. Jezuz a lavaras: "Tad, Mestr an Neñv hag an douar, me ho meul da veza kuzet
kement-mañ ouz an dud fur ha speredeg ha roet da anaoud d'ar re vian.
26. Ya, Tad, plijet eo bet deoh ober evelse.
27. Gand va Zad eo bet roet din kement a zo, ha ne anavez den ar Mab nemed an Tad,
ha den an Tad nemed ar Mab, hag an hini a blij d'ar Mab rei dezañ da anaoud.
28. Deuit davedon, c'hwi oll a zo skuiz hag a bleg dindan ho zamm
ha me roio deoh diskuiz.
29. Kemerit warnoh va yeo, deuit d'ar skol ganin,
rag me 'zo dous hag izel a galon, ha c'hwi a gavo gras.
30. Va lezenn a zo êz da heulia, ha skañv ar zamm a roan da zougenn.

PEDENN AN DIGOR.

Aotrou Doue, dre ho Mab diskennet da gemer on natur ha da houzañv ar maro,
ho peus laket en he zao gouenn an dud kouezet ken izel; +
roit d'ho pugale fidel eul levenez paduz,
ha goude beza on tennet diwar hent an ivern,
grit deom beza eüruz da viken er baradoz.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU.

Ar zakrifis ez eom da ginnig deoh, Aotrou Doue, +
grit na walho ahanom, ha ma ray deom beva muioh-mui, a zeiz da zeiz,
euz buez an neñv.

Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

GOUDE AR GOMUNION.

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, ma vim karget a vuez gand Or Zalver Jezuz Krist,
kinniget ganeom e Sakrifis
ha resevet er gomunion; +
stag ouzoh da vad dre ar garantez,
grit deom dougen frouez paduz.

Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

GOUEL SANT YANN VADEZOUR (24 a viz Even)D'an derhent

LENNADENN GENTA: Evel ar profed Jeremias, Sant Yann ivez a zo bet preparet gand Doue, azaleg an deiz kenta ma oa anezañ, evid digeri hent d'ar Mesiaz.

LENNADENN EUZ LEVR AR PROFED JEREMIAZ. I/4-10

4. Evel-henn e-neus komzet Doue ouzin:
5. - Araog da groui e korv da vamm, am-eus da anavezet,
araog ma bas deuet war an douar, am-eus sakret ahanout.
Greet am-eus ahanout eur pro ed evid ar poblou."
6. Respontet am-eus:
- A ! Aotrou Doue, n'ouzon ket prezeg,
n'on nemed eur hrouadur.
7. An Aotrou e-neus lavaret din:
- Arabad dit lavared: "Eur hrouadur on !"
Mond a ri daved ar re a lavar din dit,
hag e prezegi kement a hourhemennin dit.
8. Aon ebed n'az-peus da gaoud razo,
rag ganit emañ evid da zikour.
Lavar an Aotrou eo.
9. Neuze e-neus an Aotrou astennet e zorn
da douch va muzellou.
Lavaret en deus an Aotrou din:
- Setu ma lakan va homzou war da vuzellou;
setu ma lakan ahanout hirio da ren war ar broadou
hag ar rouanteleziou,
evid diwrizienna ha diskar,
pilad ha dismantra,
koulz hag evid sevel ti ha lakaad plant en douar.

SALM 70

I-2,3-4a,5-6ab,I5ab ha I7

diskan: Ho madelez a embannin, va Doue,
hag ho silvidigez 'hed an deiz.

1. En ho kichen, Aotrou Doue, e klaskan repu:
grit ma ne droic morse da fall va fiziañs.
2. En ho madelez, va diwallit ha va zaveteit;
selaouit ouzin ha bezit va Zalver.
3. Bezit evidon eur roh-toull d'am repui,
eur hastell-kreñv da zavetei va buez.
Ya, c'houi eo va roh ha va hastell.
- 4a - Va Doue, tennit ahanon euz dorn an den a zroug.

5. C'hwi a hortozan, Aotrou Doue,
C'hwi va esperans, Aotrou, azaleg va youankiz.
6. Warnoh on bet harpet abaoe m'emaon war an douar;
araoh m'on bet ganet, oh bet va divennour.
- I5ab.- Va mouez a zisplego ho madelez,
a zeiz da zeiz ho skoazell.
17. - Va Doue, ganeoh on bet kelennet pa oan yaouank,
ha beteg-henn n'on ket ehanet da vruda hoh oberou burzuduz.

EIL LENNADENN : An Aviel embannet gand an Ebestel a houlenn
diganeom cheñch buez, trei kein d'ar pehed
ha kerzed war roudou Or Zalver.

LENNADENN EUZ LIZER KENTA SANT PER. I/8-I2

8. Va breudeur, Jezuz Krsit a garit, heb beza e welet morse;
ennañ ho-peus feiz heb e weled bremañ c'hoaz;
hag ablamour d'ho feiz e trid ho kalon,
gand eul levenez disheñvel, karget a hloar an neñv.
9. E-keid ha m'emaoh o hounid priz ho feiz,
silvidigez hoh eneou;
10. ar zilvidigez-se, o-deus ar Brofeted klasket heh intent
ha pleustret warni;
Profedi o-deus greet diwarbenn ar hras a oa da veza roet deoh.
- II. Mall a oa ganto dizelei e pe amzer ha peseurt mare
e oa da zigouezoud ar pezh a ziskoueze dezo
ar Spered a oa enno, hini an Aotrou Krist,
o rei testiñ, en araog, euz pasion an Aotrou Krist
hag euz e hloar goudeze.
12. Diskuliet e oa bet dezo n'oa ket evito o-unan
med evidoh-hwi;
edond o tigeri an hent d'an traou kaer,
ho-peus bremañ bet kelou anezo;
dre an dud o-deus prezeget deoh an Aviel,
gand nerz ar Spered Santel kaset euz an neñv.

SALUD D'AN AVIEL

Alleluia ! Alleluia ! Kaset on bet evid prezeg ar helou mad d'ar beorien,
evid embann d'ar brizonidi e vint dijadennet. Alleluia !

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ. I/5-I7

5. En amzer Herodez, roue Bro-Judea, e oa eur beleg,
anvet Zakariaz, euz rummad Abia;
e wreg, euz lignez Aaron, a oa Elizabed heh ano.
6. O-daou a oa santel o buez dirag an Aotrou Doue;
heulia a reent direbech oll lezennou ha gourhemennou an Aotrou.
7. N'o-doa ket a vugale, difrouez ma oa Elizabed
ha deuet e oant o-daou war an oad.
8. Ha setu eun dervez m'edo Zakariaz, diouz tro e rummad,
gand e garg a veleg dirag Doue,
9. e oe galvet, dre ar zord, hervez ar hiz miret gand ar veleien,
da vond e Santual an Aotrou, da ginnig ezañs.

3. Gouzoud a rit peur e kerzan ha peur e tiskuizan;
an oll heñchou a heulian a anavezit mad.
- I3. C'hwi ho-peus greet va hreiz,
greet ar steuenn ahanon e korv va mamm.
- I4ab Trugarez a lavaran deoh evid ken kaer labour;
pegen dispar oh-c'hwi, pegen dispar hoh oberou.
- I4c. C'hwi am anaveze penn-da-benn,
neudenn ebed ahanon ne oa dianav deoh,
pa oa bet stummet va horv a-guz,
neudennet e goueled an douar.

EIL LENNADENN: Yann-Vadezour a oa bet kaset evid rei da houzoud edo ar Zalver
o tond; goudeze n'e-noa mui da ober nemed beza ankounac'heet.

LENNADENN EUZ LEVR OBEROU AN EBESTEL. I3/22-26

22. E sinagog Antioch a Bisidi, e lavar Paol d'ar Juzevien:
- An Aotrou e-neus kemeret David da roue
hag e-neus disklêriet kement-mañ diwar e benn:
" Kavet am-eus David, mab Jese, eun den hag a blij din,
senti a ray ouzin e peb kenver."
23. Hag evel m'e-noa prometet,
Doue e-neus lakeet da zevel diwar e lignez,
eur Zalver evid Israël: Jezuz an hini eo,
24. e-neus prearet Yann Vadezour e zonidigez,
en eur embann, en e raog,
ar vadiziant a binijenn evid pobl Israël a-bez.
25. P'edo war-nez echui e amzer, e lavare Yann:
- N'on ket an hini a gred deoh ez on,
med, setu ma teu war va lerh,
an hini n'on ket din da ziskoulma sandalennou e dreid.
26. Va breudeur, bugale euz gouenn Abraham,
ha c'hwi, tud a zoujans Doue,
deom-ni oll eo bet kaset ar helou-ze a zilvidigez.

SALUD D'AN AVIEL.

Alleluia ! Alleluia ! Ha te, bugelig, hag a vo anvet profed an Uhel-Meurbed,
te a gerzo en araog d'an Aotrou,
evid kempenn dezañ an hent.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ. 57-66, 80 /I

57. Deuet heh amzer, Elizabed a laka eur mab er bed.
58. Amezeien ha kerent a glev ar helou e-noa an Aotrou Doue
diskouezet e drugarez en he henver,
hag a zeu d'ober dezi o gourhemennou.
59. D'an eizved dervez, e teuont evid amdroh (sirkomsizion) ar hrouadur,
hag e felle dezo rei dezañ ano e dad, Zakariaz.
60. Med e vamm da ziskleria:
- N'eo ket, emezi; Yann e vo anvet.
61. Ar re all a lavar dezi:
- N'eus den all ebed euz ho tud o tougen an ano-ze.

62. Ha dre jestou e houlennont ouz an tad
pe ano a fell dezañ rei d'ar bugel.
63. Eñ a houlenn eun dablezenn hag a skriv warni:
Yann eo e ano.
Hag an oll a oe souezet.
64. D'an ampoent end-eeun e tigor e henou hag e teu e deod da zistagella;
kaozeal a ra ha meuli Doue.
65. Aon a grogas neuze en amezeien
ha dre veneziou Juda hed-a-hed e rede ar brud euz an oll draou-ze.
66. Ha kement hini a gleve kelou anezo a veze skoet e spered
hag a lavare:
- Petra ' zeuio eta ar hrouadur-se da veza ?
Hag e gwirionez, dorn Doue a oa warnañ.
80. Kreski a ree ar hrouadur ha kreñvaad a ree e spered.
Mond a reas da veva el lehiou digenvez,
beteg an deiz ma tlee en em ziskouez da bobl Israël.

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue !

Aotrou Doue, c'hwi ho-peus greet an deiz santel evidom,
dre hinivelez Sant YANN VADEZOUR ,
roit d'ho pobl levenez ar galon
ha renit sperejou an oll dud fidel
war hent ar Zilvidigez peurbaduz.

Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

War hoh aoter, Aotrou Doue,
e lakom on donezonou,
evid lida, evel m'eo dleet, ginivilez an hini en deus diskleriet
e teufe Salver ar Bed ha diskouezet anezañ d'an dud.

Dre Jezuz Krist, Or Zalver .AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Pedom !

Aotrou Doue, c'hwi hag a zil ennom grasou nerzuz
dre ar Gomunion, ni ho ped evid hoh Iliz.
Ra gavo levenez e Ginivelez Sant YANN VADEZOUR,
e-neus roet dezi da anaoud he Zalver, Jezuz Krist, on Aotrou. AMEN !

+++++